

Terminaled Lise Jean Macé

Lann-ar-Stêr

Balafenn Du

An holl gomañs get ur c’hwezh.

Donet a ra da vout ur red-aer. Ar red-aer a gresk betek en em dreuzfurmiñ en avel. Kejiñ a ra get un evn. Pa arriv an avel àr e live e spluja al labous. Ar gouelanig zo é pesketa. Ar pesked a dec’h kuit. Koulskoude e achuint e-barzh roued ur pesketour. Un den kozh a ya kuit get e oto. Pa dremen e-barzh ar forest e tegouezha un heizez. Aoniet eo a loen. Achapiñ a ra. D’un taol eo distanet an heizez gant bravite an natur strudus, get he livioù glas saouzanus mes pa faot doc’hti kenderc’hel get he red eo diskredapl: tan zo e bep lec’h !

An holl gomañs get ur c’hwezh.

Lous ha du eo ar red-aer. Moged zo e kement lec’h. Kreskiñ a ra betek en em dreuzfurmiñ en avel. Strouilhet. Furchal a ra evit kavout laboused. Dibosupl eo. Tostiñ a ra doc’h ar mor. Gwagennou gris a ra. A-benn ar fin e ta a-benn da welout gouelini. Unan anezhe zo bet tapet e-barzh ur roued, ar re arall a zo é klask sikour anezhañ get o figos. Divizout a ra an avel dedostiñ doc’h an aod. Mes pa arriva eo skoet get c’hwezhenn fall an douar. Plastik zo e pep lec’h. Gedal a ra loened mes diàr-wel int aet. Mantret eo gant ar skeudenn dirazañ. Choajiñ a ra da gemer souz. Sevel a ra uheloc’h, uheloc’h-uhelañ, troiñ a ra, didroiñ a ra, adtroiñ a ra betek en em gavet en egor. Spontet eo rak adalek an atmosferenn e seblanta bout an Douar evel ul lostaj ramzel.

An holl a gomañs get ur c’hwezh.

Pep jestr graet get Mab-den en deus un efed balafenn, jestroù mat evel jestroù fall...

Papillon noir

Tout commence par un souffle.

Il devient un courant d'air. Le courant d'air croît jusqu'à se transformer en vent. Il rencontre un oiseau. Quand le vent arrive à son niveau, l'oiseau plonge. Le goéland est en train de pêcher. Les poissons fuient. Ils termineront cependant dans le filet d'un pêcheur. Un vieil homme sort de sa voiture. Quand il passe dans la forêt, une biche arrive. L'animal est apeuré. Il s'échappe. D'un coup, la biche se détend devant la beauté de la nature luxuriante, avec ses couleurs vertes hypnotisantes mais quand elle veut continuer sa course, c'est impensable : le feu est partout !

Tout commence par un souffle.

Le courant d'air est noir et sale. Il y a de la fumée partout. Il grandit jusqu'à se transformer en vent. Sali. Il cherche pour trouver des oiseaux. C'est impossible. Il approche de la mer. Elle fait des vagues grises. Il finit par voir des goélands. L'un d'entre eux a été pris dans un filet, les autres essaient de l'aider avec leur bec. Le vent décide de s'approcher de la côte. Mais quand il arrive, il est frappé par la puanteur de la terre. Il y a du plastique partout. Il cherche les animaux mais ils ont disparu. Il est affligé par l'image devant lui. Il choisit de prendre du recul. Il s'élève plus haut, de plus en plus haut, il tourne d'un côté et de l'autre jusqu'à se trouver dans l'espace. Il est effrayé car, depuis l'atmosphère, la terre ressemble à une ordure gigantesque.

Tout commence par un souffle.

Chaque geste fait par l'homme a un effet papillon, les bons gestes comme les mauvais...